

HEKLEV SEVENADUREL



A-dreuz lenn

2



Petra nevez ?

7




Notennoù

19



Herve LATIMIER

**Death of a Heretic, A
Sister Fidelma Mystery,**
gant Peter Tremayne,
Headline, 2023,
448 pajenn, 16,40€



Ne vo souezhet den ebet ma vroud ar *fidelmaniac* a zo ac'hanon da lenn 33^{vet} levr istorioù *Sister Fidelma*. Ober a ra enklask gant sikour Eadulf, he gwaz, hag Enda ; penn Kadourien an Torc'h Aour, gwareded roue Muman, bepred. Evel alies e tremen an istor en un abati. Erruet eo Fidelma un tamm dre zegouezh e Imleach

Iubhair, ha goulennet e vez outi ober un enklask a-zivout marv Eskob Luxovium e Burgondia, Brodulf, keniterv d'ar roue Frank Clotaire. Kavet eo bet e-touez aspadennoù ur savadur koad bet losket. Muntret eo bet. Un eil muntr. Unan eus an artizaned a labour war chanter reneveziñ an Abati dianket. Ha liammet eo an darvoudoù ?


Souezhet on bet gant an diskoulmoù roet gant Fidelma er fin, evel da gustum. Ur perzh mat evit ur romant polis.

Kavout a reer kalz daveoù da dabutoù kantvedoù kentañ ar gristeniezh : Pelagius hag Eosten a Hippo, natur Jezuz, plas ar merc'hed, an avieloù apokrif hag ar pevar Aviel kanonek...

**Requiem pour une
République,
540 pajenn, 8,10€
Frakas,
420 pajenn, 7,50€
Mai 67,
360 pajenn, 19€
gant Thomas Cantaloube,
Gallimard**

Kavout a reer ivez un darn eus ar pezh a gas tud zo da dorfediñ : c'hoant galloud, c'hoant pinvidigezh, disouezhenn...

Aliañ a ran ar re n'int ket c'hoazh *fidelmaniac*, hag ar re a zo ivez, da lenn al levr rak, ur wech ouzhpenn, em eus lennet an istor gant plijadur.



Kinnig a ran deoc'h an tri levr-mañ asambles rak dedennus-tre int o-zri peogwir o deus evel danvez darvoudoù zo bet skoachet gant Republik Frañs e-pad pell ha bremañ c'hoazh evit lod : doareoù ar polis, an arme, ar servijoù kuzh hag ar “varbouzed” a bep seurt, hep ankouaat ar bolitikerien. Da gentañ e vezer e-kerzh brezel Aljeria (1959-

1962). Goude e weler ar skoazell roet gant Frañs da c'houarnamant ar C'hameroun evit stourm a-enep da « Unvaniezh poblañsoù ar C'hameroun » evit difenn hec'h interestoù ekonomikel e penn-kentañ ar bloavezhioù 60. En trede levr e vezer test eus an emsavadeg bobl a voe e 1967 er Gwadeloup, feulster ar voustrerezh, direizhded ar prosez

bet graet d'un toullad tud bet harzet ha toullbac'het. Kelaouenner e oa Thomas Cantaloube a-raok skrivañ romantoù. Diazezet eo e istorioù war studiadennoù resis. E fin pep levr e tispleg sklaer an nebeud traoù en deus cheñchet evit steuñvenn e romant. Anat n'hell ket bezañ gwir danvez ar c'haozeadennoù etre e dudennoù hag an niver bras a dud wirion a gaver el levrioù met klotañ a reont mat gant ar pezh a ouzer a-hend-all.

Ul liamm bras all a zo etre an tri levr. Ar memes tudennoù pouezusañ a gaver. Antoine Carrega, Korsikad bet resistant hag o labourat evit "Metoù" Marsilha, Sirius Volkstrom bet kenlabouret gant an Nazied hag oc'h ober labourioù "lous" evit servijoù liesseurt ha Luc Blanchard, poliser er romant kentañ ha kelaouenner goude. An darempredoù etre an tudennoù-se a dalvez ar boan bezañ heuliet. Ret eo ouzhpennañ Lucille Ferraci-Montout. Kavout a reer anezhi en eil romant hag ur perzh bras he deus en trede. Kejañ a ra an tudennoù gant un toullad tud "wirion", François Mitterrand, Jacques Foccard, Claude Estier, Maurice Papon, Jacques Chirac, peurgetket. Meneget e vez Henri

Leclerc, Maurice Grimaud ivez... Ur sell spis war darvoudoù bet kuzhet gant ar Stad c'hall, istorioù savet mat gant avanturioù e-leizh.

Deskiñ traoù, magañ ar preder politikel ha kaout plijadur o lenn istorioù "polis" savet mat. Petra klask ouzhpenn ?

Le monde de demain,
gant Pierre Servent,
Robert Laffont, 2022,
286 pajenn, 20€



Kelaouenner, bet ofisour a live uhel, e vez gwelet Jean Servent alies en abadennoù kendaelañ war gudennoù ar bed a-vremañ evel *C dans l'air* war ar pempvet chadenn. Geopolitikerezh, politikerezh difenn, darempredoù etrebroadel a seblant bezañ e dachennoù barregezh. Dindan titl e levr diwezhañ e kaver « *Comprendre les conséquences planétaires de l'onde de choc ukrainienne* ». N'eo nag al levr kentañ nag an hini diwezhañ war an darvoud pouezus-mañ. Ar re a glask heuliañ an traoù abaoe 2014 (aloubadeg Krimea gant arme Putin) hag an 23 a viz C'hwevrer 2022 a zesko nebeut a dra. Prizius eo koulskoude kavout ur sell hollek, gant daveoù istorel diwar-benn an darvoudoù-se hag ar goulennoù a sav abalamour dezho. Hegazet on bet

gant frazennoù nasionalist gall ha gerioù un tamm disprizus evel « *pacifisme béat* » (p.22) a-zivout Bro-Alamagn. Er pajennoù 68 ha 69 e kaver traoù damheñvel a-zivout Barak Obama « *allé jusqu'à renier sa parole* » ; « *avec un lâche soulagement* ».

Dleout a reer memes tra prederiañ war meur a boent pouezus : distro ar brezel ; ur sell nevez war an armoù nukleel « *Poutine utilise la menace de l'arme suprême comme couverture pour ses actions conventionnelles* » (p.120) ; ar c'hemmoù bras e «urzh ar bed»...

Evit an armoù nukleel e vezer pell eus an dibennadiñ ha reiñ a ra, da'm meno, un arguzenn ouzhpenn a-enep da seurt armoù.

Prederiañ war ar c'hudennoù-se a c'houlenn bezañ prest

da selaou mennozhioù disheñ-
vel diouzh ar pezh a soñjer gant
ma vezont diazezet war arguzen-
noù. Setu talvoudegezh an obe-

renn-mañ rak ret vo ober
dibaboù diaes gant « distro ar
brezel » moarvat. Kenkoulz klask
dielfennañ an traoù bremañ.



**Herve LATIMIER &
Malo BOUËSSEL du BOURG**

va Zammig seiZenn ruZ,
gant Paskal Hervio,
Al Liamm,
122 pajenn, 13€



Setu Brest, adarre, e-kreiz un oberenn lennegel ! Na souezhus pegen awenus eo bet Kêr-Vrest tro an amzer. Ar porzh bras, ar glav, ar straedoù lous, ar c'has-tell, ar galeoù, ar strailh, an arsanailh, ar morlu... Peadra da lakaat tro e pluennoù ar skriva-gnerien. Gant *va Zammig sei-*

Zenn ruZ e splujomp en XVIII^{vet} kantved. Mareoù teñval ma 'z eus, evit an dud vunut. Un ton nevez zo gant Paskal Hervio : disouezhet ha dibleg. Ur realouriezh kriz ha du, tostoc'h ouzh Louis Guilloux eget ouzh Charles Dickens, rak n'eus

daspren ebet da gaout gant ar baourentez ezhommekañ.


Lazar Kerajo a zo anezhañ ur paotr digourdi. Ganet eo bet e parrez Gouenoù, e trowardroioù Brest, e-barzh ur gumuniezh kakouzien, tud taolet ha distaolet gant ar gevredigezh. Eno en deus desket ar vicher kordenner gant e dad, alese e lezanv : Neudig. Goude ma voe tangwallet e di gant ur vandennad Barbared, tud dibardon a c'hounez un toullad gwenneien oc'h hemolc'hiñ ar c'haleourien dindan dec'h, ez a ar c'hrennard yaouank da Vrest war-lerc'h e damm kreun. Degemeret eo er « Gouent-Vihan » gant seurezed sonn war o c'hilhoroù, e-ser bugale en argoll. Dont a ra a-benn da labourat er Gordennezh Roueel. Istor chañsoù Neudig eo a gont Paskal Hervio. Bevañ, krakvevañ, dreistbevañ... Plas a zo, moarvat, evit ar garantez, daoust pe zaoust. Met gwall skoasellek e vo an hent evit Neudig ha Jani, etre ar muntr hag ar chafod.

Al lennerien ne gavint ket hir o amzer o lenn *va Zammig seiZenn ruZ*. Un daolenn istorel ha sokial livet kaer eo. Tudennoù kig hag eskern en deus treset Paskal Hervio, daoust ma

c'hellfe mont donoc'h en o buhez diabarzh. Desket e vez kalz traoù a-zivout Brest hag ar biojoù en amzer-hont. Buhez kêr, birvidigezh ar porzh brezel hag ar porzh kenwerzh, gwalenn ar vrec'h-du e 1757, ha fin d'ar pardon, evit Neudig, gant taolmor an Dispac'h bras...

MbdB

Kali Torrdent,
gant Loeiza an Duigou,
Al Liamm,
110 pajenn, 13€



Ur plac'h yaouank disaouzan eo Kali. Gwerzhet eo bet d'ur morlaer didruez : ar C'habiten Rozdir. Ret eo dezhi kuzhat he stad a blac'h evit mont da baotr-bag e-touez ar vorlaeron : Tagnous, Mamouz, Tod ar Spilhenn... Eus ul lignez a vorlaeron doujet e teu avat. Ha just a-walc'h, ambrouget eo gant tasmantez he mamm-gozh, Adora Torrdent, a voe ur gwir star e bedig-bed ar morbreizherezh. Kuzulioù diouzh an druilh a ro d'he merc'h-vihan. Lod a zo fur ha lod n'int ket... N'eus forzh, rak Kali a ra diouzh he fenn hec'h-unan. Ha sach-blev etrezo...

Penaos e teuo Kali a-benn da achap ouzh Kabiten ar Vorlaeron dre lakaat he c'hraban war e vag ? Daoust ha dont a raio da saveteñ niz ar Priñs ha da adkavout he breur gevell

Nerin ? Respontoù tomm berv a zo o c'hortoz ac'hanoc'h e pajennoù *Kali Torrdent*.

N'eo ket mestroniet steuñ-venn an dezrevell betek penn marteze. Un tammig foutouilhek e teu da vezañ mare-mare, en eil hanterenn dreist-holl. Ne 'm eus ket komprenet mat, da skouer, petra a fell d'an aozerez ober gant Nerin, breur gevell Kali... Anez e vefe un heuliad war ar stern...


Met kalz perzhioù dibar zo d'ar romantig-se : an ijin hag ar skañvder godisus da gentañ penn. Hanter-hent etre ar realouriezh hag ar skiant-faltazi. Un ton nevez. Trawalc'h da freskaat ha da vodernaat doareoù ar mojennoù kozh. Plijet on bet gant biz bihan Rozdir, dic'higennet ha kizellet gantañ e stumm un alc'hwez a zigor e goufr-houarnet. Ha c'hoazh

gant gar goad hud Adora Torrdent, graet diwar tali eneoù kollet, hag a c'hoari ur roll a bouez en danevell... An darempredoù etre ar vamm-gozh dinatur hag he merc'h-vihan a zo ken bourrus all. Ar maouezed eo a gemer o c'hreñv war ar baotred. N'int ket ken kriz koulskoude, ken hardizh ne lavaran ket, ha finoc'h alies. Diouzh red an amzer, a hirvoudo lod. Moarvat... N'eo ket ar morlaerezed a vank en istor

gwir avat. Mary Read hag Anne Bonny, div vorlaerez vrudet anezho, a rankas tremen da baotred er XVII^{vet} kantved, evel Kali, da gas da benn o micher morbreizhañ. Reoù all a zastumas gloar hep kuzhat o benevelezh, div Vreizhadez en o zouez : Jeanne de Belleville, lezanvet Tigrez Breizh, er XIV^{vet} kantved, hag Anne Dieu-le-veut er XVII^{vet} kantved...

MbdB

1984,
gant Georges Orwell,
brezhoneg gant Serj Richard,
Mouladurioù Hor Yezh,
316 pajenn, 13€



Dre zegouezh eo, moarvat, ma vez embannet bremañ, dres, troidigezh oberenn veur Georges Orwell (alias Arthur Blair, 1903-1950), e romant *1984*. Met n'on ket evit mirout a soñjal e teu al levr-se e koulz hag e kentel. Pa oa bet embannet evit ar wech kentañ e 1949, pevar bloaz war-lerc'h *Kêr al Loened*¹,
1 *Kêr al Loened (Animal Farm)*, a zo bet troet e brezhoneg gant

e oa anavezet torfedoù Hitler, Staline, Franco, Mussolini... Hervez doare, Orwell en doa kemeret harp war an ideologiezhioù-se evit sevel e varnadenn zon ha dibleg eus nep hollvelouriezh. Heñvel ez int, en o c'hreizig-kreiz, evel ma tiskouezas Vassili Grossman gant Buhez ha Tonkad, ur benn-
Erwan Hupel, hag embannet gant Skrid.

oberenn all. Da-heul hon eus bet Mao, Pol Pot, Castro, Pinochet... Ha diroufenn eo chomet oberenn Orwell. Ken gwir all ez eo hiziv an deiz pa vez anv eus renad Poutine hag eus ayatollahed a bep liv... Arlivioù zo, evel-just, evel ma 'z eus arlivioù etre ideologiezhioù an tri ziriad meur deskrivet e 1984, Okeania, Retazia hag Eurazia. Met n'int nemet arlivioù. Divrall hag hollvedel e chom sichenn ar bazhyevañ.

Arabat e vefe deomp krediñ ez omp dijablet-ni, Kornôgiz, eus ar seurt gwalennoù... Se a zo kaoz n'eo ket digoulzet Orwell. Daoust ha ne vez ket adskrivet levrioù zo, hiziv an deiz, a-drugarez d'ar *sensitive readers*, evit klotañ gant mennozhioù dereat an ampoent... *Ten little niggers* a zo deuet da vezañ *And then there were none*, ha lamet eo bet kantadoù a c'herioù e levrioù Roald Dahl : “lart”, “korr”, “divalav” ... dres evel ma vez berzet ha skarzhet geriennoù zo e toull an ankounac'h gant Ministrerezh ar Wirionez e 1984. Gwashoc'h a zo da gaout moarvat, gant an naouegezh artifisiel a vo fiziet dreist-galloudoù, a-drugarez dezhi, e

gouarnamantoù hag embrege-rezhioù kinek ha diskorpul.

Biskoazh n'eo bet ken bras galloud evezhiañ Big Brother. E bellskrammoù hag e vikroioù n'int netra e-skoazh ar pezh omp gouest d'ober hiviziken. Gant se ar c'hred sokial lakaet da dalvezout gant gouarnamant Sina evit heñchañ ar geodediz war an hent mat. Netra nevez dindan an heol...

Wilson ha Julia, penndudennoù 1984, a glask o frankiz, e-kuzh, gant ar spi kemer perzh en ur vreuriezh a ziskaro Big Brother hag ar Strollad. Brevet e vint. Mezhekaet, kunujennet, jahinet, distrujet... Ha dreist-holl dizenekaet en o don-donañ, betek karout Big Brother... Ul levr teñval ha gwazhwelus eo 1984. Skedus eo avat an ifern yen deskrivet gant Orwell. Ur bed ma vez flatret ar gerent gant o bugale. Nerzh al lennegezh eo. Tudennoù kig hag eskern a ro buhez d'ar mennozhioù.

Bamet e chomer dirak spis-welerezh hag ijin an aozer : ar soñjoù daoudu, an div vunutenn gasoni a-stroll a-enep Goldstein, an evezhiañ diharz, ar gaou troet e benveg ren, an urzhaz sokial didrec'hus en desped d'ar pre-zeigennoù kuñvaus, an doare da

vestroniañ ar wirionez dre reizhañ dielloù an tremened ha dre gas an dud mal-o-c'holl diwar spered ar bobl. « Tasmantiñ » (*to ghost*) ha « diverkañ » (*to cancel*) a vez graet eus kement-se hiziv an deiz. Ar pep kreñvañ eo ar strivoù diehan evit goveliañ ar yezh. An Nevezyezh, eeunoc'h, yenoc'h, paouroc'h, mezellet a-benn goveliañ reizhkredenn ar Strollad. « Faskour eo ar yezh, » a skrive Rolland Barthes... Souezhet e vo len-

nerien zo moarvat, met an holl ziktatouriezhioù o deus klasket mestroniañ o yezh, rak er yezh emañ andon ar frankiz, ha dre ar yezh eo e c'heller abostoliñ ha brigadenniñ Mab-den².

Ul levr a ranker lenn hag adlenn eo 1984, evit chom war evezh, paneveken.

MbdB

2 s.o. *Le pouvoir de la langue et la liberté de l'esprit*, Jacques Dewitte, Micahlon, 2007.

Sonerezh ur vuhez,
gant Andreï Makine,
brezhoneg gant Tomaz Loyer,
Mouladurioù Hor Yezh,
109 pajenn, 11 €



Anavezet eo Andreï Makine evit an *Testament Français*, aet priz Goncourt gantañ. E Krasnoïarsk eo bet ganet e Siberia e 1957, pevar bloaz goude marv Stalin. Desket en deus galleg ez-vihan gant ur C'hallez kozh, ha deuet eo da vezañ divyezhek.

Kuitaat a reas Rusia e 1987 ha roet e voe bod dezhañ e Pariz, ma c'hounezas ar vroadelezh c'hall diwezhatoc'hik. Skrivañ a ra e galleg hag ezel eo eus Akademiezh Frañs abaoe 2016.

Sonerezh ur vuhez a gas al lenner betek un ti-gar kollet

e-kreiz an Oural, m'en em gav an daneveller gant Aleseï, un den kabac'h a ra van da seniñ piano war ur benveg kozh hep stekiñ da vat ouzh ar stokelloù. Un arouez eus ur vuhez mudet, moarvat, eus ur bobl disrannet diouzh hec'h ene gant ur Stad hollec'halloudus. Tamm-ha-tamm e teu an eil hini da dommañ ouzh egile, ken e teu Aleseï da gontañ e vuhez d'e genveajer. Buhez kantroerezh un den distrujet. Aleseï en deus kemeret an tec'h an deiz m'eo bet harzet e dud. Ret eo bet dezhañ kuzhat e bivelezh hag e zonezonoù arzour dindan maskl un den marv war an dachenn emgann...

Ar Spier a zistroe eus ar Yenijenn,

gant John Le Carré,
brezhoneg gant Kristian Braz,
Mouladurioù Hor Yezh,
306 pajenn, 14€

Savet eo bet *Ar Spier a zistroe eus ar Yenijenn* evel ur pezh-c'hoari. Ur reuzc'hoari pa lavarin mat, rak ar spierien n'int nemet margodennoù etre daouarn ar Stadoù hag ar servijoù sekred. Etre Londrez ha Berlin e vea-

E-ser ar pianoour e treuzer Rusia en XX^{vet} kantved. Ar brezelioù, ar spont, an hangasadurioù¹, ar flatrerezhioù... Hag ur wechig an amzer, bann-heol ur plac'h vadelezhus, un den kalonek.

Gant nebeut a c'herioù, un c'hant pajenn bennak, e oar Andreï Makine mont d'an don donañ. Fromusoc'h a se *Sonerezh ur vuhez*. Santout a reomp e liv e dudennoù diouzh an diabarzh.

MdbB

1 Hangasadur : *déportation*.



jomp, er bloavezhioù 60, e-kreiz ar Brezel yen... Ar Stadoù, a ouzer a-walc'h, ne chomont ket etre daou pa vezont lakaet en arvar. Sigur a Stad¹ ! Dre-se e c'heller aberzhiñ an den-mañ 'n

1 *Raison d'Etat*

den e anv ur mad brasoc'h, sañset... Alese un aergelc'h gwall deñval. Didouellet ha malañjerek eo an ajanted, rak kement-se a ouzont ha kement-se a zegemeront. An dañjer brasañ, evit kas o c'hefridi da benn, eo o denegezh. Arabat karout. Arabat desevel bugale. N'eus ket tu da vezañ gwell diouzh an amzer vrav zoken... Planedenn Alec Leamas, pendudenn al levr, a bouez war chouk kement spier zo.

John Le Carré a oar war-dro ar spierezh. Eus ar serailh emañ. Pleustret en doa war an dachenn evit an MI5 a-raok mont war ar vicher skrivagner. Ur *best-seller* eo bet *Ar Spier a zistroe eus ar Yenijenn*, embannet e 1963 ha kement a verzh en deus graet ar film savet diwar ar romant e 1965, gant Richard Burton da haroz.


Souezhus eo gwelet pegen ampart eo bet rouestlet ha dirouestlet e gudenn gant John Le Carré. Ne c'hoarvez ket kalz traoù en e romant, ha koulskoude eur tapet gant un itrik diaoulek. Aketus ha didruez e vez stignet an antell. Piv ar preizh, piv ar preizher ? Pell emeur eus bed atletek James Bond ha Jason Bourne, strobet gant an uhel-

deknologiezhioù. Dre an divizoù hag ar reiz eo ez eer war-raok. Divizoù kriz ha kinek peurvuiañ, sklêrijennet gant ur bann-heol bennak pa vo kaoz eus Liz Gold, al levraouegerez re dener he c'halon. Servij sekred Bro-Saoz e reter Alamagn a zo bet diskaret gant Hans-Dieter Mundt. Alec Leamas a rank distrujañ anezhañ. Met dindan ar pavezioù, an traezh...

Plijet-bras on bet gant *Ar Spier a zistroe eus ar Yenijenn*. En tu-hont d'ar steuñvenn ha d'an Istor bras ez eus kont eus talvoudegezh ar vuhez, eus lealded Mab-den betek an nannster, eus nerzh ar garantez... N'eo ket untuek ar wirionez. Kemplezh ha kreñv eo an tudennoù. Trubuilhet int gant o dever. Lennegezh vat eo en deus roet Kristian Braz deomp da dañva, ha troet a-feson e-giz ma oar ober.

MbdB

**Nemet,
Araogenn ha stagell,**
gant Mark Kerrain,
Sav-Heol,
52 bajenn, 6€



O kreskiñ emañ, tamm-ha-tamm, dastumad levrigoù yezha-dur kinniget gant Mark Kerrain diwar-benn temoù resis : ar gerioù doubl, ar stummoù boaz, ar c’hemmadurioù, implij ar verboù... Bewech e kavan boued fresk enno hag alies ez adtapan unan anezho evit gwiriañ ar reolenn-mañ ’r reolenn. Ar wech-mañ ez eus anv eus implij *Nemet*, araogenn ha stagell. Ur mennozh mat, rak n’eo ket an hini anavezetañ ha meur a zoare zo d’ober ganti. Pegoulz ouzhpennañ *ken* ? Penaos implijout *nemet e pe nemet ha*. E peseurt degouezh e vez implijet *nemet e deroù* ur frazenn... Pinvidigezh an danvez a zeu eus korpus ar skouerioù. Brezhoneg eus ar c’hentañ troc’h eo : Ar Moal, Troude, Gab Milin, Ivon Krog, Erwan ar Moal, Lan Inizan, Fañch an Uhel, Le Clerc, Y-V Perrot, Jarl Priel, Yeun ar Gow,

Jules Gros... Ne gousto nemet 6€ deoc’h evit ober kavandenn dezho ! Hag emberr, nemet ur chañs e ve, e voc’h gouest da c’hoari gant *nemet* ken aes ha tra. Nemet un hunvre ne ’m befe ket graet ken adarre.

MbdB

**An dourvarc'h
na ouie ket neuial,
gant Jakez Segalen &
Chloé Garel-Delval,
An Alarc'h Embannadurioù,
34 fajenn, 12,50€**


Biskoazh c'hoazh ! Un dourvarc'h bihan na oar ket neuial ! Gwashoc'h zo, anvet eo bet Peskedig gant e vamm... Ar paourkaezh Peskedig n'hell ket ebatal gant strollad joaius ha disoursi an dourvarc'hed... Ret eo d'e vamm kemer preder gantañ evit pellaat al loened feuls. Rak Peskedig n'hell nemet heuliañ ribl ar stêr war droad, en e-unan ha dizifenn-kaer.



Dre chañs en em gav Peskedig gant ur ranig-boudig a ro dezhañ ar galloud da nijal. Bremañ e c'hell rentañ servij d'ar gumuniezh dre ober ar ged ugent troatad a-us d'an tropel-lad. Degemeret mat eo. Ur plas zo da bep hini, hervez e varregezhioù, na pegen disheñvel e vent... Sklaer ar gentel ha freal-zus evit ar vugale, moarvat !

MbdB

**Pourquoi sommes-nous
si mal représentés ?,
Le réveil citoyen,
gant Roger Sue,
Les Liens qui Libèrent,
91 pajenn, 12€**



Ul levr prederiadennoù a-zivout enkadenn an demokratelezh e Frañs hag an diskoulmoù da glask. Penaos reiñ nerzh d'ar

geodedouriezh en-dro ? Kelenner *emeritus* er Sorbonne eo Roger Sue. Sokiologour anezhañ, studiet en deus, e-touez

traoù all, bed ar c'hevredigezhioù hervez lezenn 1901. Ezel eo eus kuzul-merañ Luskad ar C'hevredigezhioù (*le Mouvement Associatif*).

Div lodenn a ya d'ober al levrig : « *La République défaite* » ha « *La Force citoyenne* ».

Deskrivañ a ra al lodenn gentañ stad an traoù abaoe 1968. N'eo ket aet betek penn an hunvreoù : kemmet ar gevredigezh met tost kemm ebet en ensavadurioù Stad. Un touflez bet toullet tamm-ha-tamm etre an dud hag ar sistem politikel. N'eo ket al labour ken pouezus evit an dud ha koulskoude e vez bepred lakaet en a-raok gant ar gouarnamant. Ur benveg da dreuzkas an digevatalderioù eo ar skol. Ar servijoù publik zo en arvar. En em santout a reer touellet. Pelec'h emañ “promesaoù” ar republik ? « *Dans un pays qui a porté très haut les valeurs d'égalité et de libre accès à des services publics performants et innovants, les conséquences sont ravageuses. [...] De la “monarchie républicaine”, reste surtout la monarchie* » (p.39). Kalz a dud o deus ar santimant bezañ bet dilezet hag ober a ra an tu dehoù

pellañ e vad eus ar saviad (pp.43-45 el lodenn « *Quand démocratisation rime avec droitisation* »). Un dañjer bras evit an demokratelezh. Goude bezañ roet e ali war ar stummoù “demokratelezh perzhiañ” a vez klasket sevel, e kinnig Roger Sue un hent : adreiñ e ster d'ar geodedouriezh, danvez an eil lodenn.

Pouezañ a ra kalz war plas ar c'hevredigezhioù. Da gentañ evel lec'h ma vever ar geodedouriezh ha ma tesker bevañ anezhi. D'an eil peogwir e produont madoù boutin, ar mad evit an holl, en diavaez eus sistem ar marc'had betek kemer plas ar servijoù publik diouzh ret. Evitañ e vefe ret sikour anezho kalz muioc'h eget ma ra ar Stad evit an embregerezhioù (e 2022 8,5% eus Ar Produadur Diabarzh Kriz ha 41% eus budjed ar Stad ! - p.70) ; gwarantiñ o emrenerezh evit ma c'hellint “kensevel” ar politikerezhioù ha ket bezañ e dalc'h ar galloud kreiz pe lec'hel. El lodenn « *Une autre République ?* » e ra eus an digreizennañ « *la mère de toutes les réformes* » (p.76). Lakaat a ra en a-raok emrenerezh ret ar strollegezhioù lechel hag ar fed e vefe bet lamet diganto

un darn vras eus o mammennoù arc'hant. Kinnig a ra e vefe roet ur plas gwirion d'ar "gevredigezh sivil" en hentenn ar sevel lezennoù (pp.79-84). Evit se e vo ret cheñch ar Vonreizh. El lodenn ziwezhañ e rebech an diouer a breder (« *vide relatif de la pensée* » - p.80) ha pouez re vras ar sontadegoù evit ar bolitikourien hag ar gelaouennerien (« *Une opinion n'est ni une connaissance, ni une compréhension, ni une interprétation, même pas une conviction ou une*

motivation. » - p.87). Kiladennoù spontus a zo er mare-mañ. Ur spi : ha pa rankfer tremen dre ur prantad aotrouniek pe zoken hollvelour e vo adkavet pen-naenn ar c'hevredañ, hep ideologiezh, na programm politikel met un hentenn evit adkavout mammennoù an demokratiezh hag adlakaat ar c'heodedour e-kreiz ar jeu (p.89).

Ur benveg a breder evit pep hini ac'hanomp ha, peurgetket, evit an holl dilennidi.

HL

Miz Mae : Paskal HERVIO ; Marc GUIRIEC ; Dr Yves GOURVES ; PAOL. & M. -T. CALVEZ ; Yannig MENEZ ; Patrice DREANO

— War un dro : 150€

*Mil drugarez a lavaromp ur wech ouzhpenn
d'hor skoazellerien.*

LIZHIRI

Skignet war Facebook gant Erji Kerno

Sant-Malo, Sul Fask

Mignoned,

E niverenn *Al Liamm* 462, pajenn 63 e lennan :

« Alphonse de Châteaubriand... (a) ra meneg eus Osian, e-giz er
Génie du Christianisme... »

Feuket-bras on bet ! Ma droukvesket ho peus gant Alphonse de Châteaubriant, gant â ha T.

N'omp ket kar tamm ebet !

Me, François-René de Chateaubriand (hep â ha gant D) am eus skrivet *Le Génie du Christianisme*, dalc'hit soñj, me ho ped.

Kuit a zroug !

A galon,

Fañch de Chat'

KLOKADUR

War niverenn 463 *Al Liamm* e oa bet embannet ar ganaouenn *Ars longa, vita brevis* skrivet gant Gwenn-Ael ar C'helleg. Ur varzhoneg n'eo ket avat. Un tamm skrid a oa ouzhpenn evit kinnig ar ganaouenn. Ne oa ket emgavet e koulz siwazh. Setu eñ amañ da-heul :

Sevel barzhonegoù, sevel, treiñ pe azasaat kanaouennoù evit lakaat un ton hengounel brudet pe vrudetoc'h war unan pe ziv anezho zo mat. Kemer perzh e raktresoù *Bannoù-heol*, da skouer, zo tad. Ha setu Gilles, kelenner e skol sonerezh ar Poc'hêr, ur gitarour donezonet anezhañ, o lakaat an tach din : sevel ur ganaouenn evit kas ur raktres da benn gant strollad sonerezh rock ar skol, tud vras ha krennarded ennañ, goude bezañ displeget din, e berr gomzoù, ne vefe ket mui an darn vrasañ anezho skolidi dezhañ a-benn bloaz pe bloaz hanter. Lod, barrek an tamm anezho, a vo erruet en oad da vont d'ober o studioù da lec'h all, pell diouzh ar Poc'hêr. Lakaet en deus Gilles en e soñj tennañ e vad eus o bloavezh diwezhañ-se evit lakaat anezho da vont pelloc'h ganti.

Waou ! Moan e oa ma revr ganin, me 'lâr deoc'h. Sevel un nebeud pozioù diwar c'houlenn evit tud yaouank. Adtapout unan bet savet ganin dija ? Sevel unan penn-da-benn ? Ober gant klotennoù diabarzh pe klotennoù diavaez ? Ober gant gwerzennoù eizhtroadek ? Ha plijet e vint pe ne vint ket ? Daoust din arvariañ warnon goude merenn ne oan ket chomet ken pell-se etre daou soñj a-benn ar fin. Gwir bater eo, e c'hallit krediñ, dre an hentoù e kerzhe an awen... An deiz war-lerc'h, souezhet e vijec'h bet o welet ar barzh awenet gant Doue pe gant..., o tuañ lizherenn-ha-lizherenn e bajenn wenn... o verkañ hag o tiverkañ ur ger, ur skej, ur werzenn amañ hag ahont hep gouzout re da belec'h e oa o vont...

Eizhtez war-lerc'h, ur wech bet lennet ma zamm skrid gantañ, e oa bet kinniget din gant Gilles sevel an ton da lakaat warnañ. Biskoazh kemend-all ! Gwech ebet ne 'm boa graet an dra-se c'hoazh. Distroet d'ar gêr, goude merenn, em boa tapet krog em gitar, tredan pe folk – n'ouzon ket mui tamm ebet evit lavaret ar wirionez – ha sonet un nebeud klotadoù o vousekanañ pe o kanañ ar pozioù kentañ war un dro ha kement tra a oa bet skrivet ganin, pozioù-kan hag all. Un nebeud deizioù da c'houde em boa lakaet Gilles da selaou ar pezh am boa graet, un tamm douetañs ennon...

Ha setu ni hon-daou, Gilles ha... ha me, o kempenn-diskempenn, o labourat evit sevel un ton rock nevez... da seniñ asambles war al leurenn er bloaz a zeu gant tud yaouank... Kement hag ober em boa kinniget deoc'h lenn ma c'hanaouenn un nebeud sizhunioù zo

a-raok kinnig deoc'h selaou anezhi, deiz pe zeiz, dindan he gwiskamant notennoù.

Ars longa, vita brevis

Ars longa, vita brevis
Hir an arz, berr ar vuhez
N'eus ket amzer da goll
Evit bleuniañ, ober berzh
Kaout plijadur er vuhez
Ars longa, vita brevis
Daoust ma'z eo hir deskiñ seniñ
N'omp ket bet, gwech ebet, e soñj da skeiñ
an trebez war-lerc'h ar sklisen
Ur pal hepken : seniñ war al leurenn
Daoust ma'z omp sot gant ho tonioù
N'hon eus ket c'hoant, Jimmy, Amy, Janis...
Mervel e barr hor yaouankiz
Ur pal hepken : lakaat tan en hor gitaroù
Ars longa, vita brevis
Hir an arz, berr ar vuhez
N'eus ket amzer da goll
Evit bleuniañ, ober berzh
Kaout plijadur er vuhez
Ars longa, vita brevis

*Gwenn-Ael ar C'helleg
Karaez, d'an 18 a viz C'hwevrer 2024*

LISE DIWAN KARAEZ

E miz Gwengolo a zeu e vo digoret gant Diwan kentañ bachelouriezh vicher e brezhoneg, setu un doare evit Diwan da adkavout e berzh nevezin e diorren ar brezhoneg en deskadurezh.

Ur vachelouriezh vicher AEPA e vo, war ar buheziñ gant bugale ha tud war an oad.

Padout a raio 3 bloaz ar stummadur-mañ, ha digor eo d'ar grennarded goude an trede klas. Pal ar stummadur a zo :

- Stummañ tud a-vicher war ar buheziñ, gouest da azasaat o doare da vugale pe da dud kozh o emrenerezh breskaet

- Kinnig meur a staj evit ur sell pleustrek war ar vicher (24 sizhunvezh war 3 bloaz)

Stummet e vo ar grennarded war ar frammoù reoliñ hag aozañ ar vicher, war an teknikoù micher, hag ur ouiziegezh don war aozadurioù publik ha prevez ar vicher hag an holl gevredigoù.

Ledan eo al lec'hioù ma c'haller labourat goude ar stummadur-mañ : kreizennoù dudi, diwallerezh, Tiez an Holl, Tiez ar Vro, Tiez ar Yaouankiz hag ar Sevenadur, EHPAD, kouskvaoù, kreizennoù sokial, servijoù skoazell e ti an dud, ospitalioù, aozadurioù sevenadurel...

Evit gouzout hiroc'h : <https://www.diwan.bzh/br/ouverture-dun-bp-aepe-au-lycee-diwan-de-carhaix-en-septembre-2024>

lise.karaez@diwan.bzh

02.98.99.36.73

PRIZ EMGLEV BRO-GWENED/SKOL-UHEL AR VRO _____

D'ar Sadorn 25/05 e oa bet roet priz ar romant brezhonek gant *Emglev Bro-Gwened* ha *Skol-Uhel ar Vro* e-kerzh gouel *Livr'à Vannes*. Er bloaz-mañ eo bet roet ar priz da Loeiza an Duigou evit he levr *Tan de'i*, embannet e 2022 gant *Al Liamm*.

O veajiñ e oa ar skrivagnerez, setu m'eo he mamm he deus resevet ar priz eviti ha lâret ur ger dirak an holl dud bodet er saloñs.

Emañ *Embannadurioù Al Liamm* o paouez embann ur romant all evit ar grennarded skrivet gant Loeiza : *Kali Torrdent*.

Gourc'hemennnoù dezhi !

Miliadoù a dud a oa bodet d'ar Sadorn 25 a viz Mae e Montroulez evit degouezh ar Redadeg. An “Treuzkas” a oa dodenn ar bloaz-mañ. Treuzkas ar yezh, evel-just, hag er familhoù dreist-holl, met treuzkas santimantoù, gouiziegezh, fent ha me 'oar-me... dre ar yezh ! Implijout ar brezhoneg evit skrivañ hon Istor, ha treuzkas an holl draoù-se d'ar rummadoù da zont, hor bugale ha bugale-vihan.

Plijadur e-leizh a zo bet treuzkaset e-kerzh ar gouel aozet gant tud a youl-vat KLT – Ti ar Vro Montroulez ! Ur bern tud a oa en em gavet er “Manu” evit kenderc'hel gant ar gouel e-kerzh ur fest-noz bras ha sonadegoù a oa ivez er sal SEW.



Ar vazh-test o tiskenn eus pont Montroulez a-raok ar c'hilometr diwezhañ redet gant familh an Dreo, hag ambrouget gant miliadoù a dud.

2222 km a zo bet redet er bloaz-mañ, miliadoù a rederien a-hed an hent, dindan ar glav pe an heol. Ouzhpenn 2060 km a zo bet gwerzhet. Ar wech kentañ eo e vefe gwerzhet kemend-all. An arc'hant, evel bep bloaz, a vo roet ul lodenn da Rouedad Diwan evit harpañ ar c'helenn dre soubidigezh. A-drugarez d'ar werzh vras-se e c'hallou *Ar Redadeg* sikour an holl raktresoù a oa bet dibabet :

Splann !, Timilenn, Ti ar Vro Kemper, Kleor, Skol an Emsav, Dibistig, Teatr Piba, ha PlumFM.

Goude degouezh ar Redadeg e vez digoret ar vazh-test treuzkaset a reder da rederez, yaouank pe yaouankoc'h, ha lennet an destenn a oa chomet kuzh betek-henn. Izili ar familh an Dreo eo o deus skrivet an destenn er bloaz-mañ, un destenn liesvouezh diwar-benn an danvezioù a c'heller treuzkas, hini ar yezh en o zouez evel-just. Gallout a reer he selaou pe he fellgargañ war lec'hienn Ar Redadeg :

<https://www.ar-redadeg.bzh/br/kemennadennou-ar-vazh-test/article/kemennadenn-2024>

Gourc'hemennoù d'an holl hag a-benn daou vloaz ac'hann !

ATLAS AR BEDOÙ FALTAZIET _____

Betek an 23 a viz Even e oa tu da rakprenañ *Atlas ar bedoù faltaziet* gant Kristian Goindin ha Jerom Olivry, kinniget ennañ oberennoù heverkañ ar fantazi gouronel (*heroic fantasy*) gant kartennoù ar bedoù ha livadurioù a-vil-vern. Tizhet eo bet ar pal 1500€ war lec'hienn Ulule (hag ouzhpenn zoken) hag ho trugarekaat a reomp a-greiz kalon.

M'ho pefe c'hoant da rakprenañ al levr c'hoazh e c'hallot en ober en ur bellgargañ ar follenn rakprenañ war hol lec'hienn ha kas deomp en-dro gant ar paeamant, betek ar 15 a viz Gouere :

https://t.alliamm.bzh/Rakprenadenn_Atlas.pdf